

"mouez Breiz"

PLADENNOU (diskou) SONEREZ

ha KANAOUENNOU

euz BREIZ, BRO-SKOS ha BRO-IWERZON

Pladennou 33^r ha 45^r :

Tost da 100 seurt deut er-méz



Pladennou

MOUEZ BREIZ

a vez kavet e ti an oll varhadourien diskou

Roll kaset evid netra : goulenn digand

Disques "MOUEZ BREIZ", H. WOLF, KEMPER

Lêz ar zaout ha viou yar !

6

Me a varvo ma n'he havan !
Va halonad zo leun-barr !
Klaskit Mari va zud karet,
Kement hini zo din kar !

O ! LAKIT HO TROADIG...

O, lakit ho troadig,
Va dousig Marjanig,
O, lakit ho troadig
E-kichen va hini :

Ni vo troadig on-daou,
Ken na deuiio marh Laou
Da gerhad ahanom on-daou !

O, lakit ho karig,
Va dousig Marjanig,
O, lakit ho karig
E-kichen va hini :

Ni vo karig on-daou,
Ni vo troadig on-daou,
Ken na deuiio marh Laou
Da gerhad ahanom on-daou !

O, lakit ho klinig,
Va dousig Marjanig,
O, lakit ho klinig,
E-kichen va hini.

Ni vo glinig on-daou,
Ni vo karig on-daou,
Ni vo troadig on-daou,
Ken na deuiio marh Laou
Da gerhad ahanom on-daou !

O, lakit ho tornig,
Va dousig Marjanig,
O lakit ho tornig
E-kichen va hini :

Ni vo dornig on-daou,
Ni vo glinig on-daou,
Ni vo karig on-daou,
Ni vo troadig on-daou,
Ken na deuiio marh Laou
Da gerhad ahanom on-daou !

O, lakit ho chodig,
Va dousig Marjanig,
O, lakit ho chodig
E-kichen va hini :

Ni vo chodig on-daou,
Ni vo dornig on-daou,
Ni vo glinig on-daou,
Ni vo karig on-daou,
Ni vo troadig on-daou,
Ken na deuiio marh Laou
Da gerhad ahanom on-daou !

O, lakit ho pegig,
Va dousig Marjanig,
O, lakit ho pegig
E-kichen va hini :

Ni vo begig on-daou,
Ni vo chodig on-daou,
Ni vo dornig on-daou,
Ni vo glinig on-daou,
Ni vo karig on-daou,
Ni vo troadig on-daou,
Ken na deuiio marh Laou
Da gerhad ahanom on-daou !

(Kanaouenn euz Hañveg, Bro-Gerne.)